


# VA BOUTOU KOAD



Hi - zio eo ec'h e - sé-an va bou-tou koad, m'o doug vit ar wech



ken-lan, va bou-tou koad, Hag int a zon ker brao, klik klak, o



ge lan-la, Hag int a zon ker brao, ma ho skoan heb ar-zao !

Bemdez, breman m'o lako, va botou koad,  
Vit monet d'ar skol ganto, va botou koad,  
Hag int a ray dalc'hmat klik klak o ge lan la.  
Hag int a ray dalc'h mat, klik klak, va botou  
[koad.

Er parkou hag el lannou, va botou koad,  
Me 'z aio da glask neiziu, va botou koad,  
An evned a gleva : klik klak, a ge lan la !  
Me gargo va botou a blu hag a viou.

Pa vo eur fest er pennker, va botou koad.  
Me ne jomin ket er ger, va botou koad,  
Me iei en eur ober : klik klak, o ge lan la.  
Da goroll d'an dachenn, da heja va c'hroc'henn.

Pa vo dre-ze, eur pardon, va botou koad,  
En eur ober orezon, va botou koad  
Me iei ivez eno, dousik, o gé lan la,  
Heb ober trouz ebet, — er chapel venniget.

Pa vo echu va buhez, va botou koad,  
Ma 'e'h erru ganen eun dez, va botou koad,  
Nijal d'ar baradoz, klik klak, o gé lan la.  
Skei 'rin ouz an trejou, gant pennou va botou.